

# KANTIK DA SANT BUDOC

Patron Plourin

---

## DISKAN

Kanomp, kanomp gant levez  
Meuleudi Patron ar barrez.  
En env en deus eur renk huel      )  
E touez sent coz bro Breiz-Izel.      ) *bis*

### I

Henor ive ha karantez  
D'ho mam ha d'hon alvocadez,  
D'ho mam vad santez Azenor      )  
Furra princez ' voue en Arvor.      ) *bis*

### II

Ouzomp oc'h karget gant Doue,  
Parrez Plourin eo ho leve.  
C'hui 'peus, a dreus ar c'chantvejou      )  
He diouallet eus an envou.      ) *bis*

### III

C'hui o c'heus desket d'hon tud koz  
An hent da vont d'ar baradoz,  
Deskit ive d'ho bugale      )  
Karet ho bro, karet Doue.      ) *bis*

### IV

Sicourit oll dud ar barrez:  
An emzivad, an intavez;  
Sicourit ive an tadou,      )  
Ar vugale hag ar mammou.      ) *bis*

### V

D'ar pinvidic evel d'ar paour  
Discoezit o peus kaloun aour,  
N'ho dilexit ket eus an Ee      )  
Rag oll e z'int ho pugale.      ) *bis*

VI

Euz ar mintin beteg an noz  
Var hon labour skullit bennoz,  
Anez ne dal ket d'an dachen      )  
Benza glebiet gant ar c'hoezen.      ) bis

VII

Guech all, d'ar bobl eus o parrez,  
Evel eur merk euz o karantez,  
Dre destamant, araog mervel,      )  
C'hui bromettas, o preac'h santel.      ) bis

VIII

Dre c'hallooud ho preac'h béniget  
Hon diouallit dious peb pec'het,  
Grit ma chomimp guir gristenien,      )  
Fidel d'hor feiz ha d'hor c'hreden.      ) bis

IX

En hon eneb, an drouk-spered  
A zo hirio dijadennet,  
Rodal a ra var zouar Breiz      )  
O klask bepred mouga ar feiz.      ) bis

X

Eur vezen, douret e griziou,  
A zoug bleun, frôuez ha delliou;  
Douret ive gant goad Jesus      )  
Hor feiz a vo bepred nerzus.      ) bis

XI

Biken an ifern kounaret  
Na zeui a-benn eus Bretouned.  
Ato betek ar maro      )  
Ar feiz a vo henor ar vro.      ) bis

XII

Ho relegou a zo ama  
En eun Ilis eus ar c'haera  
Ha dirazho gant hor peden      )  
Ni veulo Doue da viken.      ) bis

### XIII

O Sant Budoc, Sant galloudus,  
C'hui zo tost da galoun Jesus,  
Pedit evidomp deis ha noz,      )  
Ma zeimp ganeoc'h d'ar baradoz.      ) *bis*

IMPRIMATUR : *Quimper*, 11 avril 1902.  
FLEITER, v. g.

---

## KANTIK SANT ROCH

---

### DISKAN

Sant Roch, patron meurbed galloudus  
Eus an dud klanv hag ankeniet,  
Pedit hor Zalver trugarezus  
D'hor miret oll diouz peb klenvet.

### I

Diskennet eus eul lignez huel,  
E rannit d'ar paour ho tanvez,  
Evit galloud beva ha mervel  
En dienez, er baourenteze.

### II

Reded a rit da zikour kériou  
Trubuilhet oll gant ar vossen;  
E peb karter e rit burzudou,  
E tennit an oll a anken.

### III

Soulaji a rit gant madelez  
Ar glanvourien gèiz dilezed.  
Ho pedennou hag ho santelez  
E peb leac'h a voug ar c'hlenved.

### IV

'Vit ho nessa c'hui offr o pue,  
Kals a zeu d'ho tigemeret  
Evel eun eal deuet aberz Doue  
Da zouten an dud trubuilhet.

V

Breman c'hoas eus a lein an envou  
Gant ar garantez ar vrassa  
E voughit krenn e kals a vroïou  
Ar vossen hag ar c'holéra.

VI

C'houi er goar, patron karantezus,  
Hor pec'hejou, hor goal vue  
A denn varnomp klenvejou spountus,  
Grit ma tistroïmp ouz Doue.

VII

Sant Roch, skouer euz an oll vertuziou,  
Grit ma kouitaïmp ar pec'het  
Ha ma c'heuillimp oll ho exemplou  
'Vit ma vimp en env kurunet.

IMPRIMATUR: *Quimper, le 4 octobre 1867.*  
EVRARD, vic. gén.

